

(447, suite)

D'an Autrou Duc d'Orléans,
 D'ar c'henta q'elou e voa an Duges douguerez.
~~Var guinidiguez, Louis-Philippe-Albert d'Orléans e var,~~
~~Cont a Paris, 24 eost 1838.~~

(448)

P'an boe-me an enor, va Fring meurbet caret,
 Da gredi adress d'ec'h, gant ar brassa respet,
 Rimou en Brezonec var an act solenna
 A liamos ho sord d'ar Brinces Helena,
 E pedis va Doue, deus a greiz va c'halon,
 Da scuill varnoc'h ho taou e venediction.
 Pebes joa a santan en c'hreiz, hirio an de,
 E c'houzout otreret abers Roue an ee
 An dezir a formen gant eur galon ardant
 D'ho courzout peurgarguet eus a gontantamant.
 Nan, nen deo mui douetus... ar brud a red dre 1/2 Frang;
 Ar Brinces a zo Mam, dre c'hraç ar Brovidanç.

Ah! deurvezit, va Fring, bars en deiz eurvus-mâ,
 Permeti din gemer eur perzic eus ho joa.
 Tad oc'h!... oh! caera tatr!... Stat eurvus bras meurbet;
 Stat pini a beur-stard carantez daou bried.

Ra blijo gant Doue cundu mad d'e zermen
 Eur Brinces qer caret gant an oll Francisien!
 Ra deuyo da rei d'ec'h, ebars en deiz caer-ze,
 Un aelic d'ho renta eurvus hed ho pue.

(449)

Allas! nebeut tria oin, mes va joa a vo bras,
 Na ellan-me gouzout, va Fring, ho pezo c'hoas
 Ar vadelez meurbet da receo a c'hraç vad
 Va c'hompilant giurion, dre ma zoc'h hirio tad.

Ra deuz Roue an ee, carquet a vadelez,
 Da scuill var ho famill a bep seurt levenez.
 Se a regetan d'ec'h, ô Pring meurbet caret:
 Ra vezo gant Doue va vœu accomplisset!

A. Lédan.

(Vol. IV, p. 447-449.)

Les deux lignes barrées ici le sont également dans le ms.; elles ont été remplacées par: "D'ar c'henta q'elou...", ligne écrite dans l'interligne, entre les 1^{ère} et 2^e lignes primitives.

